

# GUERZ LEDRU-ROLLIN

(Var ton : *Ker Is*)

188

Partiet eo an Dru'Rollin  
Leun a chlac'har ac a chagrin  
Caret a rea ar micherour  
Pep tra 'n deus great vit he sicour.

Mes, allas ! ar paysantet  
Zo bet ingrat en e handret  
O rei ho moueziou d'an dud nobl  
A hed ar veach treitour d'ar bobl.

Breman paour kès divar ar mez  
Vo guerzet did da tyeguez  
O credi an dud a ilis  
A oar da trompla e pep guiz.

Pa vezes er park o labourat  
O c'houezi an dour ac ar goad  
N'e pevez ken evit regal  
Nemet yod a bara segal

Ar veleyen a ra bombanç  
Bemdez cher vad en abondanç  
Kezek lard eus ar re vella  
D'ar presbytaliou d'ho zreina.

Clevet vezont o tiebati  
Ar c'halotennou dizoursi  
O tebri rost oc'h eva guin  
Divar goust ar merc'het o c'hoarzin.

Douçoc'h evit croc'hen er gô  
Mezer caer zo var ho zro  
Vit represanti hor Zalver  
A zo bet ganet er vizer.

Pa entreer bars en ilis  
Ne glever met trous ar mounis  
Ne reont netra ep paeamant  
Tout e verzont evit arc'hant.

Deus an templ zo gret eur voutik  
Deus ar religion eur trafik  
Corf, goad ac ene hor Zalver  
A vez guerzet var an aôter.

Invantet deus ar govession  
Vit souten ho domination  
Ha d'ar religion gristen  
Zint ar goassa adversourien.

Ar veleyen ac an noblanç  
Voa guechal commandi Franç  
Ar c'hastel ac ar presbytal  
Trete hon tud goas vit chatal.

Clevet ho peus ho tadou kos  
O conta pa ve deuet an noz  
Guechal eun nobl vit pemp guennec  
A helle laza eun tyec.

Ar mab hena deus pep lignez  
A voa dezan tout an danvez  
'N nosvez kenta eus oc'h euret  
Vije d'eun nobl... paourkes goazet.

Allas ! ne ya ket mad ar bed  
Falloc'h gouscoude eo bet et  
Red eo domp combati bepret  
A enep ar feneanted.

Pa deuo deiz an election  
N'heuliomp ket aliou ar person  
Rac mignonet ar veleyen  
Zo treitour d'al labourerien.